

AR VOT E POULLAOUEN

Excuset eur pot yoank
Neuz nomp lakat da rima
Voar zujet an electionnou
Ag vezo bars miz maë kenta.

Dishan

Fouei fouei da vaër Poullaoën
Neuz chanchet tu di chupen
Ag semblez gantan i daou agen
Zo koueset ar meumez cherlenn.
(Dans le même pétrin)

Ag ben ar bemp a viz maë
A gredan a meuz klevet
Vezo galvet an electourien
Evit ar votadek.

Evit han-va consaillerien
Ebars an oll barochou
Presentet vez dan electourien
Deuz a bep sort listennou.

In parros Poullaoën meuz klevet
Lavaret vezo diou listen
Na vezo ket nemed unan ru
A nini all zur zo gwen.

Listen ar gwir républicanet
Formet gant socialistet
Voted evite, oll electourien,
Zur na vezoc'h ket trompet.

Gouzout a ramp ar socialisted
A zifen ar liberté
Ag ben ar bemp a viz maë
A reman do majorité.

Unan all glevon zo presentet
Gant parti a reman ven
Daouste a sonjet nefint bet
Kaout succès e Poullaoën.

Nemed gwelloc'h vezo di gotoz
Evit hoas eo goal abred
Ar republik neo ket maro
Ag beo na vezo ket interret.

Ar kerra deuz ar listennou
A zeo hini Pierre Saliou
Chanchet deuz tu do chupennou
A breman zeo gwen o liou.

Rag o listen a zo guën
A na houlën quet lavaret.
Gant parti an Ancien
Hag hini Lohéac zo gret.

Oll memp klevet maër Poullaoën
A lavaret meur da vech
Evit caouët eur veurh, eur marh
Rac na vezo quet penvedik.

Dishan

Evit cavet eur veurh, eur marh,
Na vezoc'h quët capitalist.
Beb hini gle chom ne renk
Ag beza socialist.

Heman neuz teier pe beder,
A martreze neuz ouspen ;
Lammet divar e varh ru
A pignet var e varh guën.

Beza maïnk haloupad ar herio
Coulz an déiz evel an noz.
Scovet a zink gant ar boan ben,
Neink quet kin evit repos.

Elerh chicour an oll baoueriën
Ag ober dim henchou,
An arhant a vezo kasset
Evit ober cannoniou.

Nimed goude a teufe ar brezel,
Ar reman do droug abed
Ebar combat Pont ar Zaout
A zinc bet goal vlesset.

Rag breman an oll electouriën
A gredan zo avertisset.
Arog monet da voti,
Choazet mat o pillet.

Houï a lako ebars ar voest
Listen ar socialisted.
A var nizi tri var nuguën,
Nemed neuz hini péchard abet.

An hini neuz gret ar rimou
Neo quet an oad da voti.
Mais onn devez benag a zo tonet,
Heman a vo ferm di barti.

Na reo quet evelt Pipi pe Jakez,
Evelt Job pe Youën,
Sull gwech a iëlo da voti.
Na chancho ket tu di chupen.

Eben devez ar votadek,
Da reman vo lavaret :
Chomet a dréou 'ta, potred,
O chupennou zo dislivet.

